

# AR ROUE GRALON

## Ha Kear

### AR ROUE GRALON HA KEAR IS

Hag Iis Mirakulus  
ann Itron Varia Remengol

« Neb a hed Gwer'hez Remengol  
« Biviken ne ia da gol... »

En Eskopli Kerne el lec'h e ma breman  
môr Douarnenez, e oa gwechall eur gear  
vraz meurbet hanvel Is.

Eur voger ledan hag huel, gant sklu-  
jou houarn, he difenne deus ar môr.  
Er gear-ze ne vellet, e touez ann dud  
pinvidik, nemet dizarz, goall exempli ha  
fallagriez. Gralon, pehini a chome neuze  
er gear a Is, a oa Roue Breiz-Izel. Bet  
e oa brezeller en he iaouankis, ha rust  
en andred he zujidi; mes enn he  
gozni, sklerijennet dre ar feiz kristen, e  
teuz da veza dous evel eun oan. Hir-  
voudi a rae aliez war dizurzou Is, ha  
war ar vue dirollat a rene he wer'h, ar  
Beinsez Ahez, gant an noblaz yaouank  
a gear ha deuz ar vro hanvet hirio Kear-  
Ahez, pehini a oa dezhi a leve.

En amzer-ze ive, e oa e Breiz-Izel,  
daou abostol santel, daou vignon da  
Zoue, Sant Kaourintiu, kenta eskop a  
Gemper, ha Sant Gwenole (1), kenta  
abad a Landevennek; aliez o devoa pre-  
zeget ar feiz er gear a Is, ha gour-  
drouzet ar Roue Gralon, abalamour  
d'ann drougeron, d'ann torfejon ha  
d'ann injustison a ree benvez, e pates  
he wer'h yaouank; mes goab a ree  
anezho, hag ar Roue, simplet dre ann  
oad n'en devoa mui a c'halloud avoalc'h,  
evit arreti dizurzou kor bras.

Done skuizaz er fin o welet Is kaledet  
enn he fec'hejon, hag a roaz da anaout  
da Ael Breiz-Izel he vignon Gwenole,  
penoz eb dale pell, ar gaer-ze a  
vije heuzet gant ar môr. KerKent, Gwe-  
nole a pignaz war he wer'h hag a redas  
da gear Is, o sonjal c'hoaz mouga koler  
Done. Mes tremenet e oa an amzer a  
druzez. Pa en em gavas an Abal santel  
war dro anter-noz, sklujou Is a oa di-  
gor, hag ar môr a groze spontus, o  
liruiat war an dud, ann tier hag ar pale-  
zou. Gwenole ne allaz savelei nemet  
Gralon epken; gwelet a rer c'hoaz rou-  
dou treid ar marc'h er garek war pehini,  
abaoue, abaded Landevennek, arog ke-  
mer ho c'harg, a deu da ober ho fedon ha da  
anaout ar Roue Gralon evit fondatour hor c'hout.

Ahès merc'h fall ar Roue, kiriek ar revin Is, oé troet e *Mari Morgan*, anter maouez hag anter pesk. Par bar al  
loar, e c'hlever c'hoaz aliez o kana, war môr Douarnenez, a euz reveniou, ar gear veuzel. He daoulagad a zo evel  
diou stereden, he bleo evel ann aour, he gouzoug hag he diou vronn ken gwenn hag ann er'eh, hag e mouez melo-  
dinez a laka da gouskat dre he chalmou; evelse, martolodet ar vro, raktal ma he c'hlevont, a lavar elrezho, gant  
spoueon: Tee'homp, Ahès a zo zavet deus he falez, ar gwall amzer ne ma ket pell, ha ma taleomp e vezimp tolet  
kouzet war ar ree hier.

Evel Sodou, Gómor, ha Babylon, kear Is ne m'a mui; hag hirio ar môr a ruill dreist he fenn.  
Da zao heol, Gralon o veza pignet gant Gwenole yar lein Menez-Hom, a daolas ac'hano eur zell truezus war e  
lec'h; neuz el lec'h ma odo ar gear Is, ne velas mui nemet môr Douarnenez, hag e kouezaz d'ann daoulin evit tru-  
garekal Done hag ar Wer'hez da veza saveleel he vuez.

(1) Gwenole e O'l-e-Gwen, (il est tout blanc) hanvet evel-ze gant he vason ar santez Ven abalamour ma oa eur bugol koant a  
eur S. n. Gwer'hez, dez he v. dizouz, er deuz merc'h a ann kear El Breiz-Izel, l'ange de la Bretagne.



Braz ive ar bu  
andret ar heler  
rouchoudou.  
Ar vinoret dile  
war ar mor bras  
darn all en dises  
gant garante ha

Petra 'zo neve e kear Is.  
Ma ze ken foll ar iaouankis?

Moderato



# E GRALON

## Kear Is

Différent du 649 A f OLLIVIER ?

560/380 cm



Pa zavas diwar he zaoulin, e velas diñdan ann heol, o lugern, *Ru-men-Goulou* pe *Men-ru-ar-Goulou*, war pehini vije sakriflet tud en beo, ha bep mis, eur bugel bihan, c'hoaz euz ar vronn. Neuze, beuzel enn he zaolon, hag he zaoulagat savet etrezek ann Ev, e lavyas d'he vignon santel.

« War ar Men-ru-Hont, konsakret da « enn Doue barbar, me a rei sevel eun « ilis kaer d'ar Werc'hez, hag el lec'h ma « skuifler goad ann dud da Deutates, « « skuillo mam ar gwir Doue he grasou « war Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'haz mad d'ber c'her, ha beleien ar batarnet o veza o en em revoltel pa velont dispen templ an Doue faos Teutates, ar Roue kristen o zebas e keyer Argol e penn ar Vrettonnet konvertisset.

Goude beza gread he beden, war Menez-Hôm, ar Roue Gralon a heuilhas Gwenole da abatti Landevennec savet gant-han, eun neubent blavezioù kentoc'h. Diaraog kement-se, en devoa c'hoaz roet he bales, e Kemper, da Sant Kaourintin, pehini en devoa torret he naon dezhan ha de gompagnunez gant eun tam deus e besk bian. E plas ar pal-se e ma breman ilis kaer katredal Kemper.

Gralon a dremenaz e Landevennek a rest euz he vuez eun eur binijen gallet, hag alies e kare mont gant he vignon ker da Remengol da hebi evit he bobl, ann *Itron-Varia-Remed-Oh*, beza en devoa eun heur d'he gwelad brudet bras e pevar c'horn Breiz-Izel, hag o vervel etre divrec'h sant Gwenole, e Landevennek, e rekommande he ene da Zone eun eur lavaret gant fizioù.

**Itron-Varia Remengol,**

Mirit onzio na zain da goll.

Pemzek kant vloas a zo aboue ma 'zo maro Gralon, hag ar Vretoned, pere zo bepret tud a feiz hag a galon, o deus c'hoas sonj eus ho roue koz hag eus he vignon, Sant Gwenole. Mes ma anavezent gwelloc'h istor ho bro gaer, pa zeont da zul an drindet da bardon bras Remengol, ha pa velont môr Douarnenez, Menez-Hôm, Landevennek ha tour huel ilis mirakulus ann *Itron-Varia-Remed-Oh*, a lavarfont ann daelou enn ho'daoulagat, eun eur vale gant respék war douar ar Zent hag ar Rouaned.

Braz a burzudou a zo bet

Ebars ann amzer dremenet !...

Braz ive ar burzudou a ra c'hoas hirio, ann Itron-Varia-Remengol, en andret ar Vretoned, ha, dreist-oll, en andret ar behermet a deu bemde da gwel, alies eus a hel bro, ha kalz nuez ho diarchen hag e korf ho rouchouñ.

Ar vinoret dilezet, an intanvezet-paour, ar beorien noaz, souldardet Breiz-Izel, e kreis tann ar brezel, ar vartolodet war ar mor bras e furol ann holl dud aflijet a gorf, a galon hag a speret, darn en ho foaniou, darn en danjerriou, darn all en disesper ha darn ive, war gwelc'hoaz, o deus sonjet eus ho Mamm douz a mad, hag aliès e leveront dez-gont garante ha gant fianz enn he galloud hag enn he madelez.

O Gwerch'hez sakr Remengol, Patronez Breiz-Izel,

Pedit evidomp, hirio ha pa rankimp mervel :


Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vrettonnet

O deus ho kare!, a kare hag ho kare bepret.

Par bar al  
la zo evel  
nez melo-  
zho, gant  
amp tolet

ens war e  
evit tru-

gel koant a



e kear Is, Maz e ken foll ar ia - ouan - kis

Mes, reñted skar voe'h e  
E sail prim da c'heul Gwenole  
Hag he varc'h, gleb e beder c'har,  
A lamp deus ar môr en douar.

Breman, ed e Mari-Morgan,  
Ahès, deuz skeud al loar a gân,  
A gân hag en eur vousc'hoarzin.

Da zao heol, graon o veza pignat  
Ierc'h ; mez el lec'h ma edo ar gear Is, ne velas mui nemet mór Douarnenez, hag e kouezas u am gaoan  
garekat Doue hag ar Werc'hez da veza saveleet he vuez.

[1] Gwenoll e O'le-Gwen, (il est tout blanc) hanvet evel-ze gant he vamm ar santez Ven abalamour ma oa eur bugel koant a  
far. S. n. Gwerc'hez, dre he veltuzou, er deuz nemet a hano kear El Brei-Izel, l'ange de la Bretagne.

I

Petra 'zo neve e kear Is,  
Ma ze ken foll ar iaouankis?  
M'ar klevan-me ar biniou,  
Ar vombard hag an delennou?  
N'euz e kear Is netra neve,  
Ann ebattou ma ve bemde,  
N'eus e kear Is nemet traou koz,  
Ann ebattou ma ve bemnoz.

Bojennou drez zo divoannet  
Ha dor ann ilizou prennet,  
Ha war ar beorien o wela  
Ec'h hisser ar chas dro drailla.  
D'ho c'hoeczek via ann oll verc'het  
N'ho deuz doue, met ar pec'het  
Ha da ober he gurunen,  
E roont ho c'haera rozen.

Ahès, merc'h ar Roue Gralon,  
Tann an ifern enn he c'halon,  
Er penn kenta deuz ann dirol,  
A gas d'he c'heul ar gear da goll.  
Sant Gwenole, gant kalonad,  
Zo bet meur vech e kaoud he zad,  
Ha gant daelou ann den Doue,  
Enn deuz lavaret d'ar Roue :

— « Gralon, Gralon, laka evez  
« D'ann dizurzo a rên Ahès,  
« Rag tremenet vo ann amzer  
« Pa skuillo Doue he goler.

« Ellec'h ma voa c'hoarsadek kent  
« E vo neuze skignadek dent,  
« El lec'h ma voa kanaouennou,  
« E vo neuze skrijadennou !... »

Hag ar Roue koz spouronet,  
He verc'h hen evez kelennet;  
Mez diskaret dre ar gozni,  
N'euz mui ann nerz da stourm outi.

Ha, skuiz gant rebechou e zad,  
Evit mont deuz he zaoulagad,  
Hi 'deuz gret gant droug-sperejou,  
Eur palès kaër tost d'ar sklujou.

Eno, gant he amourouchen,  
E ma fennoz ann obaden,  
Eno, enn aour hag er perles,  
Evel ann heol e par Ahès...

II

— « Plijadur dec'h er palès-man,  
« Merc'hed gentil a potred skan,  
« Plijadur dec'h ha nozvez grên. »  
Eme eur prinz enn eur antrenn.

Ar prinz a zouge dillad ru,  
He varo a voa hir a du,  
Hag he izili a verve,  
Hag he zaoulagad a zeve.

— « Ra viot deut mad, estranjour,  
« Eme Ahès gant eur beg flour;  
« Ia, ra viot deut d'argwella,  
« Mac'h n'hanvëit ann traou falla.

Moderato



— « Neuze m'em bo digemer mad,  
« A respontas ann divroad :  
« Rag me ar fall zo ken disket  
« Hag ann hini neuze en krouet !... »

A kerkent Ahès d'er pedi,  
Da ober eun dro zanz gant'hi,  
Hag ann oll, a eneb Doue,  
Gwassa ma c'hallent a Zoue.

Pa voa d'ann obaden-ze fin,  
Danser Ahès, en eur c'hoarzin,  
Hag enn eur zével he ziou skoa,  
A lavaras : — « N'ouzoc'h netra !... »

« Kerc'hit din'me deus a gear Is,  
« Veseillou santel ann ilis  
« Kerc'hit kroas ar c'hrussufiet  
« Eun hosti sakt, hag e velfet !

Ahès, respontas timad :  
— « Kavet vint enn iliz va zad,  
« Rag va zad diot-me a gred  
« Enn trompler-ze a Nazareth !... »

Tri a. redas e ber amzer,  
Hag a ziskaras ann Aoter,  
Hag an traou zakr a we douget  
Etre ho daouarn miliget,

Ar Prinz ru, raktal m'ho gwelas.  
A greis he galon a c'hoarzas,  
Hag a lavaras c'hoas enn-han :  
— « Plijadur dec'h er palès-man ! »

Da genta a doliou boutou,  
E vrujunas ar veseillou,  
Goude flastras ar grussifi,  
Hag e krenchas war ann hosti !... »

A war-n'he, gant oll e noaz,  
En eurgana. — « Malloz d'argroaz ! »  
E raz e seiz stum dishenvel,  
Dansou ar seiz pec'het marvel !... »

Kerkent ar palès a grenas,  
Hag ar c'hurunou a strakas,  
Hag a dreuz ho zellou nec'het,  
E skoas tan glaz al luc'het.

— « Na c'houi vel, eme ar Prinz ru  
« Me laka Doue war e du... »  
Ma lavarent oll gant glac'har,  
— Ahès e deuz kavet e far !... »

III

Pa voa fin d'ar sakrilejou,  
Messajer ann droug sperejou,

Chomet e unan er palès,  
A dosteaz da gaout Ahès.

— Va dousik koant, merc'h  
[C'hras  
« Ha muia karet va c'halon,  
« Ha n'elfent me ket eneb gris  
« Guelet alc'houe sklujou ker I

— « Va zad a zoug enn he gerc'h  
« Ann alc'houe aour deuz eur cha  
« Ha va zad breman zo kouske  
« Hakaout ann alc'houen'allan

Mes hen d'he zreid enn em strin  
Ha d'he dornik flour a bokaz,  
Hag e dallas dre he zellou,  
Karget a dan hag a zaëlou.

IV

Heb goud ar pez a dremene,  
Neuze eur pennad ac'hane,  
Enn e balès ar Roue koz,  
E voa kousket e kreiz ann noz.

Kambr paour Gralon ne voa enn  
Netra nemet eur grussifi  
Deut a zorn eur mignon ker,  
Sant Kaourintin, Eskop Kemper

Netra nemet eun Aviel,  
Roët gant eur manac'h zantel,  
Roët dez-han gant Gwenole.  
Evel eur merk a garante.

Kaër enn e gozni vel eun AEL,  
E kouske Roue Breiz-Izel,  
Hag enn dro de dall, e vleo gw  
A re, dispak, eur gurunen.

Neuze, Ahes, ar brinsez fall,  
Evel pa vije skoët dall,  
Enn e gamb, heb aon rag Dou  
A deu da laères an alc'houe.

Enn eur vale war beg e zroad,  
Ar verc'h a desta skan d'he zad  
A goustadik deuz e gerc'hen,  
A denn n'eur c'hoarzin, ar cha

V

Piou a deu du-hont gant ar ru  
Pignet war eun hinkane du,  
Hag hen d'ann daoulam war ar  
Ken a strink an tân deuz ar ve

PEDEN AR ROUE GRALON

Itron Varia Remengol  
Mirit ouzimp na zaïmp da goll ;  
Pedit ive ho mab Jesus,  
Ma vezimp gant-han evuruz.  
Itron Varia-Remengol,  
C'hui eo Rouanez ar bed oll,  
Bezit hor mamm, hor Patrones  
Ha ni ho meulo da james.

[1] Remengol, hanvet gwechal *Ru-Men-Goulou*, da lavaret *Men-Ru-ar-Coulou*, abalamour  
voa eno eur men ru, eun templ konsakret da c'houlou de, enoret evel eun Doue, dindan ann  
a Deutatès, Doue Tad. Ar Roue Gralon, goude beza diskaret ann templ-se, ha savet enn e  
eun ilis kaër da Vam ar Gwir Doue, chenchas hano payen *Ru-Men-Goulou*, enn hano kris  
*Remengol*, da lavaret e *Remed-Oll* deus a behini ar batronez a zo hanveet ann *Itron-Varia-R*  
*Oll*. Notre-Dame de tout Remède, abalamour d'ar burzudou bras a ra bemdez eno ar Verc  
abaoue amzer ar Roue Gralon betek hirio.  
Eno zo c'hoas induljansou a re vrassa roet gant hon Tad santel ar Pab dan oll gristenien  
da Remengol da bedi a galon, Patronnez Breiz-Izel. Dre eur skrit Apostolik roet e Rom, e

eur bagel koant a

Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretónnet  
O deus ho karet, a a kar hag ho karo bepret.



ve e kear Is, Maz e ken foll ar ia-ouan-kis



er bi-ni-ou Ar vom-bard hag ann te-len-nou

Chomet e unan er palès,  
A dosteaz da gaout Ahès.

— Va dousik koant, merc'h da  
[C'hralon

« Ha muia karet va c'halon,  
« Ha n'effent me ket eneb gis  
« Guelet alc'houe sklujou ker Is. »

— « Va zad a zoug enn he gerc'hen  
« Ann alc'houe aour deuz eur chaden  
« Ha va zad breman zo kousket,  
« Ha kaout ann alc'houe n'allan ket.

Mes hen d'he zreid enn em strinkas  
Ha d'he dornik flour a bokaz,  
Hag e dallas dre he zellou,  
Karget a dan hag a zaélou.

IV

Heb goud ar pez a dremene,  
Neuze eur pennad ac'hane,  
Enn e balès ar Roue koz,  
E voa kousket e kreiz ann noz.

Kambr paour Gralon ne voa enn-hi  
Netra nemet eur grussifi  
Deuet a zorn eur mignon ker,  
Sant Kaourintin, Eskop Kemper.

Netra nemet eun Aviel,  
Roët gant eur manac'h zantel,  
Roët dez-han gant Gwenole.  
Ével eur merk a garante.

Kaër enn e gozni vel eun /El,  
E kouske Roue Breiz-Izel,  
Hag enn dro de dall, e vleo gwen,  
A re, dispak, eur gurunen.

Neuze, Ahes, ar brinsez fall,  
Evel pa vije skoët dall,  
Enn e gambr, heb aon rag Doue,  
A deu da laères an alc'houe.

Enn eur vale war beg e zroad,  
Ar verc'h a dosta skan d'he zad,  
A goustadik deuz e gerc'hen,  
A denn n'eur c'hoarzin, ar chaden.

V

Piou a deu du-hont gant ar ru,  
Pignet war eun hinkane du,  
Hag hen d'ann daoulam war ar gein  
Ken a strink an tân deuz ar vein ?

Hennes eo messajer Doue,  
Digaset enn Is d'ar Roue,  
Hennez eo Abostol ar feiz,  
Sant Gwenole, karet e Breiz.

Tostât'ra en eur c'haloupad  
En he zorn deo e vaz abad,  
Hag eur stol aour war he zaë venn.  
Hag eur c'hele'h tân enn dro d'he beun.

Setu hen e dor ar palès  
E p'hini e kousk tad Ahès  
Diwar e varc'h an den zantel,  
A c'halv, enn noz a vouez uhel

— « Gralon, Gralon, sao hep dale,  
« Sao evit heuilla Gwenole,  
« Sao evit tec'hel deuz ar mor,  
Sklujou kear Is a zo digor !

Hag ar Roue koz trubullet,  
E mez he vele zo zaillet.  
— « Din-me, din-me, va marc'h prima  
« Siouas peurgollet ar ger-ma !..

Ha war e varc'h e ber amzer  
E kerz da heul e vignon ker,  
Ha war o lerc'h, enn eur iudal,  
E klevont ar môr o ruial.

Neuze ar brinsez dirollet,  
He amourouz gant-hi kollet,  
Dre gear Is, a glei hag a zeo,  
A rede, dispaket e bleo.

Pa glevas daou lamp ar c'hezek  
Araog ar môr e tiredek,  
Dre al luc'het gant nec'hamant,  
Hanveaz e zad hag ar zant.

— « Va zad ! va zad ! mar em c'harit,  
« War o marc'h skan va c'hemerit »  
Hag, he respont, an tad tener  
A zao e verc'h war ann tailler.

Kerkent ar môr a vuanna,  
Ha Gwenole, en eur grenna,  
A gri : « Gralon, töl ann diaoul-ze  
« Diwar dailler da hinkane !..

Kouskoude c'hoas leun a ankres,  
Ann tad a zalc'h ar bec'herez.  
Mez ar zant a ra zin ar groas  
Hag a stok outi pen he vaz.

Kerkent, mestres an droug speret  
A ruil er môr bras fuloret,  
Hag e kleo tost ar Roue koz  
Eur c'hoarzin skiltr e kreiz ann noz.

Mes, rented skar voe h e d'he  
E sail prim da c'heul Gwenole  
Hag he varc'h, gieb e beder e'har,  
A lamp deus ar môr en douar.

Breman, ed e Mari-Morgan,  
Ahès, fleuz skeud al loar a gân,  
A gân hag en eur vouse'hoarzin,  
A grib er môr he bleo bezin.

VI

Da zao heol ar zant ha Gralon,  
A bigne war lein Mene-Hôm,  
P'hini, he dreit ebars enn treiz,  
Zao he ben war Douarnenez

Ac'hane Roue Breiz-Izel,  
War he lerc'h a dolaz eur zel ;  
Mez, el lec'h Is, gant he deg dor,  
Ne velas mui nemet ar môr.

— « Eur gear em boa deus ar gaëra,  
« — Ha setu hi et da netra !... »  
Hag he galon oll a fraillas,  
Hag he zaoulagad a welas.

— Gralon, Gralon me Gwenole,  
— Gralon, d'ann daoulin ganen me.  
Ha Gralon dindan e c'hlaç'har,  
A goë d'ann daoulin d'ann douar.

Hag eno, dispak e vleo gwenn,  
Hag e dall pleget er boultren  
E lavare c'hoas ar Roue :  
— Ra vo gret bolonte Doue !..

Pa zavas diwar he zaoulin,  
Dindan tân-flamm heol ar mintin.  
A velas, a dreuz he zaélou  
E lugerni *Ru-Men-Goulou*.

War ar men-ze, hon tadou koz,  
A skuill goad d'eun Doue foz,  
Hag ar Roue, e ber amzer,  
A lavaraz d'he vignon ker :

— « Du-hont, e memor a gear Is,  
» Me zavo d'ar feiz eun Ilis,  
Rag evit testeni d'ann oll  
M'he galvo ilis Remengol (1)

« Rag war dolen ru Deutatès  
« Me lakaï da ren ar Werc'hez,  
« Ha beb bloas, enn enor d'ar groas,  
« E rin ober eur pardon braz.

« Eno, ann oll dud afflijet,  
« A gavo d'ho foanniou remed,  
« A silvidigez d'ho ene,  
« Dre c'hras Mari gwir vamm Doue

« Pa vo ann Doueou maro,  
« Ha koët meur a goat dero,  
« Eun de, deuz ar pevar avel,  
« E teuo d'hi pobl Breiz-Izel.

Neuze ma ve sonj a Gralon,  
E vo lavaret a galon :  
— « Braz a burzudou a zo bet  
« Ebars enn amzer dremenet!..

da lavaret *Men-Ru-ar-Coulou*, abalamour ma  
blou de, enoret evel eun Doue, dindan ann hano  
eza diskaret ann templ-se, ha savet enn e blas  
io payen *Ru-Men-Goulou*, enn hano kristen a  
batronez a zo hanveet ann *Itron-Varia-Remed-*  
*burzudou* bras a ra bemdez eno ar Werc'hez ;

hon Tad santel ar Pab dan oll gristenien a den  
Dre eur skrit Apostolik roet e Rom, éa Ilis

Sant-Per, kement beleg a lavar an ofern war an aoter-vras ann Itron-Varia-Remengol, a denn  
boanniou ar purgator eun ene p'hini a ia rektal d'ar barados.

Androgont a vis mæ 1838, ann Itron-Varia-Remengol a zo bet kurunet gant eur gurunen aour ha  
perles, roet dez-hi gant hon Tad Santel ar Pab Pii Nao.

Remengol a zo bet, a viskoas ar gaëra hag ar santela Ilis a Vreiz-Izel ; enoro a rer enn-hi  
darn euz ar groas hag ar gurunen sperrn J.-Ch. darn enz ar relegou ar Werc'hez, Santez Anna  
Sant Joseph, ann Ebistel, ann Doctoret euz ann Ilis, Sent Breiz-Izel ha relegou ouc'h pen daou  
vil sant all : hervez an dud koz, peb gwir Vreton a dle, eur vech da viana, *deo pe vara*, ober  
pelerinach Rumengol.